



## AN TOUR DANTELEZET

1  
E Kastell-Paol ez on-me ganet,  
O kêr santel a Vro-Leon,  
O parrez va hentadou karet,  
Te zo rouanez va halon !

### DISKAN

Nann, n'ez-eus ket, nann n'ez-eus ket,  
Eur barrez ken mad d'am halon er bed !  
Me gar va hleuz alaouret, { (2 wech)  
Va zour dantelezet !

2  
Eur gouriz mor a deu da walhi  
Ha da drempa on douarou :  
Pa vez ar gourlan, pebez dudi  
Taoler eur zell war on aochou !

3  
On touriou kaer ha dantelezet  
A bar an deiz laouen drezo,  
On iliz vraz ken brao kizellet  
Zo gwir Rouanez an oll vro !



## BINVIYOU SONEREZ

A. LAURENCEAU

Mestr-Micherour

12, Rue Jean-Jaurès, NAONED (Nantes)



## LANIG

BOMBARDOU  
BINIEIER

Añchennou, Seier ha  
Ficherez

## TABOULINOU

"Carlton"  
ha "Lanig"

Krehin nilon  
"Carlton"

Krehin leue  
kenta danvez

Bizier "Carlton"

Knee-rests  
Harneziou gwenn  
Aroueziou

**Peb tra evid ar  
Zonerien !**